



Rener·ez lise

Kinnig labour embannet d'an / ar mard 19 novembre 2024

Lec'h : **Karaez (29)**

Doare post **CDI H/F**

Kerkent ha posubl

Deskrivadur ar post-labour

Emañ Diwan o klask ar rener·ez evit al Lise Diwan Karaez. Ul lec'h n'eus ket e bar evit a sell ouzh diorren ar brezhoneg. Pa ranker plediñ gant al labour melestradurel rik, e vezer e kreiz ar jeu ivez evit kemer e lod e raktres kaer ul lise e brezhoneg penn-da-benn eus an eilvet klas d'ar c'hlas termen ! Ouzhpenn da-se ez eus bet digoret un hentenn micherel BVTk (Buheziñ evit ar Vugale hag an Dud Kozh) da geñver distro skol 2024.

Rener·ez al lise a zo e-karg eus mont en dro al lise war an tachennoù da heul :

Pedagogiezh
Buhez-skol
Melestradur
Surentez

D'ar rener·ez eo da gas war-raok al labour evit seveniñ e/he g/c'harg. Evit-se e ranko :

Aozañ ha ren an emvodoù penngasourien, penngelenerien ha skipailh.
Merañ ar servijoù, an implijoù amzer, tuta implijidi.
Sevel ha merañ ar budget.
Bezañ e darempred gant Diwan, an deskadurezh stad, ar familhoù, ar rannvro.
Aozañ ar c'huzulioù klas, an emvodoù kuzul merañ, an arnodennoù pe deskadurezh stad pe Diwan.
Kenlabourat gant ar gevredigezh o verañ herberc'h al liseidi (bod ha boued).
Labourat ingal gant ar benngasourien ha penngelenerien war ar raktres pedagogel ha desavadurel.

Skiant-prenet ha barrezhioù goulennet

Doare den

Live Bak + 4
5 bloavezh skiant prenet en deskadurezh d'an nebeutañ (kelenner·ez, penngasour·ez (CPE), kasour·ez)
En ho aes oc'h evit daremprediñ kenkoulz dre gomz ha dre skrid kement e brezhoneg hag e galleg, mestroniañ a rit an urzhiatear hag anavezout a reoc'h mat mont en-dro an Deskadurezh Stad.
Efedus evit aozañ ho labour e ouezit merañ an danvezioù mallusañ ha gouest oc'h da merañ meur a zoser war un dro.

Titouroù all

Lec'h labour : Karaez
Kevrat : Didermen
Padelezh labour : Hervez an diskarg eurvezhioù
Deiziad kregiñ : An abretañ ar gwellañ
Gopr kregiñ : diazezet war ho indis deskadurezh stad
Statud : Sterniad·ez
Spletoù : gwarez yec'hed, prevoyañs

Trugarez d'an dud a vefe dedenet gant ar post dont e darempred ganeomp evit kaout muioc'h a ditouroù.

Ma z'oc'h dedennet gant ar post, trugarez da gas ho CV mui lizher en em ginnig da **tuta@diwan.bzh** a-raok **an 06/12/2024**.

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://www.diwan.bzh/br/offres-emplois/directeur-rice-de-lycee-191120241010>